

DA VEMOR AR GONIDIG.

DA BEHINI E ZEUS SAVET EUR BEZ

E KONK,

ELEC'H E ZIO LAOHT E RELEGOT,

D'ar Sul, 12 eus a vis Here 1845.

Seiz vloas zo en deiz-mâ hor mignon Gonidig,
Ar gwizieka den en hor Iez Brezonek,
Goude pemp miz gouzanv a rentas e ene,
Evel eur gwir gristen, etre daouarn Doue.

Eur c'hoant vras hor boa oll ma elje dont un deiz
E gorf paour da vezia en hor brô ger a Vreiz;
Hor c'hoant zo aotreet, hervez m'er goulennemp;
Mignoned a Baris zo deut d'en digas demp:
E relegot, hirie, goude oll daskoret
En e vro ger a Konk, el lec'h ma voe ganet,

A ya da arzañ. E genvroiz eno,
Evel gwir gristenien, evitan a bedo.

Endra pad e vuez e tle peb gwir Vreton
Kaout memor GONDEC e gweled e galon ;
Rak dezàn e tleomp talvoudegez ar reiz
A velomp zo ~~hio er ker~~ ~~er ker~~ ~~er ker~~ hor Breiz.

Breiziz ! unanomp oll hor pedennou brema,
Stouet var hon daoulin amañ var ar be-mañ,
E pini eo laqet corf paour hor mignon ker,
Hak a greiz hor c'halon pedomp oll hor C'hrouer
Da zont da zic'haoui eus eur vuez poannius
Eun den a voe ker mad ha ker karantezus !

Hirio e velomp mad ~~peget~~ ~~er~~ eürus
Beza renet atao eur vuez vertuzus.
Sellit hor beyleyenn hac hor c'henta pastor
O renta d'hor mignon an diveza enor,
Dre o c'hanvou a gaoun etrezek hak an eo,
O pedi evitan madelez eun Doue.
Unanomp hor peden gant re e vinistret,
Hak eus eur gwir glac'har bezomp oll treantet.

N'eo ket d'ar brasderiou, na ken-nebeut d'an aour
E renter anorien (GONDEC a voe paour),
Mes d'an den gwiziek, d'an den leal kristen,
Na vo ankounac'hât gant nep Breiziad biken.

Evit dont da gendelc'h atao e peb Breton
Demeus AR GONDEC memor en e galon,
Eur Men-hir var e vez a zo brema savet,
Var behini e zeus gant eves bras skrifet;

« Peulvan, diskid d'ann holl hand AR GONDEC,
« Den gwiziek ha d'en fur, tad ar gwir Brezonek. »

Ha neuze, izelloc'h, var eur men all e vo
Ar geriou-mâ skrifet ivez e iez hor brô :

« Ganet é Konk, 4 miz gwengôlô, 1775.

« Maro é Paris, 12 miz here, 1838.

« Béziet é Konk...., an 12 eus a vis here, 1845. »

Eun niver bras a dud eus a bep kôrn ar vro
D'ar zul, daouzek here, en em gavo eno
Evit pedi Deuz var bez : **Ar Goudec**,
Enor demeure hor Breiz, reitor ar Brezonek.

Unani rân amâ va feden gant ho re,
Mignoned **Goudec**, a weler va ene;
C'houi pere ell hirio peuz-ober ho lead
Var bez eur gwir Breiziad, mignon fur ha den mad.

D'am c'halon e vije eur frealzigez
Ellout monet ivez da bedi var e vez,
Hogen pa ne ellân, nôs ha deiz em speret
Hano **Ar Goudec** am ho bezand bepret.

10 here, 1845.

Eur Breiziad.



**EN EUR GLÉVOUT NE ZEUS LAVARET NEP GER BREZONEK
VAR BEZ AN GONIDEC.**

Penaos ? nep ger ebet en hor iez Brezonek
Ne zeus het lavaret var bez An GONIDEC
Oh ! pebes dienez a zereadigez
Evit envor hor Mestr, reizer bras eus hor iez
Eus a weled e vez e relegou, hep mar,
O devije trided a galoun an douar
Gant laouenidigez e klévous komz eno
Eur Breziad mad benek er iez ker eus e vro
En Brezonek, dréist oll, eo e tlayet meuli
An den ker, gwiziek er iez ker hor brôni
Piou en deveus biskoas koulz hak én dellezet
Brassoc'h meuleudiou abets ar Vretonet ?
Doutan eo e tleomp an digemast, ar reiz
A velomp zo hirio en hor iez ker a Vreiz
GONIDEC ! gwir Breziad, eus a lèin an ènvou
Deus da zigemeret hor gwir meuleudiou :
Da hano dirviken na vo ankounac'het
Epad vo ur strill goad ebars er Vretonet.

Brest, 1845

14 here, 1845.

Eur Breziad.

Morlaix, Impr. de Lédan.